



Pont Krac'h Pont an Diaoul

PONT KRAC'H, PONT AN DIAOUL

C'HOARI FARSUS EN UN ARVEST

C'HOARIERIEN

An diaouled : Satan, Lusifer,
Belzebut, Berit, Astarot,
Mefistofelez ha Paolig Kornek.

Ar Wrac'h.

Ar Vugale.

Ar Vamm.

An Azen

Ar C'hazh

Ar Miliner

An Ael.

KENTAÑ DIVIZ

En Ifern. An diaouled : Satan – Lusifer -Belzebut – Berit – Astarot

An Diaouled

Fall ar stal en ifern !

N'hon eus tamm labour ebet ken.

Pratik ebet ken.

Berr lost an arc'hant.

Dilabour !

Ret eo deomp mont da glask hor bara !

Ret eo deomp mont war an Douar Bras.

Klask labour.

Klask eneoù evit tan an ifern.

Da belec'h mont ?

Me oar da belec'h mont !

Lavar deomp 'ta neuze !

Tost d'an Aber Ac'h ez eus ur voereb kozh din o chom.

Gwrac'h an Aber Ac'h eo hec'h anv.

Ma ! Arabat chom da yariñ amañ !

Deomp dezhi !

DIVIZ 2

E ti ar Wrac'h

Ar wrac'h

Me eo ar Wrac'h !

Gwrac'h an Aber Ac'h, Glav hag avel ken a gac'h !

(Tok, tok... ouzh an nor)

Piv zo aze 'ta ?

Deuit en ti ! Stag eo ar c'hi.

(Erru eo an Diaouled.)

Biskoazh kemend-all !

Va c'hendirvi, an Diaouled spontus !

Penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

An diaouled

Setu ni, Belzebut, Astarot ha Berit,

Mevelien Vihan, Mevelien Vras, an Diaoul Satanaz.

Penaos emañ kont ganeoc'h, tintin muiañ karet ?

Ar wrac'h

Etre karrez ha ront

E-mod-se emañ kont !

Petra zo nevez ganeoc'h ?

Deuet oc'h eus an lfern ?

An diaouled

Fall-ki an traoù ganeomp.

Pratik ebet !

Tamm labour ebet !

Gwenneg toull ebet ken !

Aet eo ar stal da stalig...

...hag ar stalig da netra.

Ar wrac'h

Mantrus eo !

Penaos reiñ skoazell deoc'h ?

Anaout a ran un tiegezh paour – paour razh... Miliner eo an tad.

Fritañ laou a reont war bilig ar baourentez. Gwerzhañ a rafent o c'horf hag o ene a evit kaout ur vuhez aesoc'h.

Un diaoul

Pelec'h emaint o chom ?

Ar wrac'h

E Milin an ael, etre Kernaot ha Lezerdot.

Un diaoul

Un ael ! Ne c'hellimp ket mont di !

Ar wrac'h

Arabat deoc'h ober biloù. Pell zo n'eus ael ebet ken eno. Kit da gavout ar miliner... Grit marc'had gantañ.

Un diaoul

Peseurt marc'had ?

Ar wrac'h

Peseurt marc'had ? Peseurt marc'hadoù a ra an diaouled 'ta ? Prenañ eneoù !
Na petra 'ta ?

Un diaoul

Prenañ eneoù ! Anat eo ! Bennozh Doue deoc'h... heu... Bennozh an Diaoul
deoc'h; gwrac'hig kozh.

Ar wrac'h

Me eo ar wrac'h !
Gwrac'h an Aber Ac'h.
Trouz mor en Aber Ac'h,
Glav hag avel ken a gac'h !

DIVIZ 3

*War ar maez, en ur wenodenn voan ; ar vamm hag he bugale o tougen
sac'hadoù bleud. Skuizh int, fallgalonet, marnaoniet.*

Ar vugale

Pegen pounner eo ar sac'hadoù bleud, mamm !
Skuizh omp, mamm, skuizh-marv.
N'on ket gouest da zougen va sac'had ken.
Chomomp a-sav mamm.

Ar vamm

Kalon deoc'h va bugale. Pounner eo ho samm, a ouzon. N'eo ket aes hor

buhez.

Ar vugale

Perak ar vuhez-mañ, mamm ?

Perak e vez ret deomp kas ar sac'hadoù ken pell.

En tu all da ganol an Aber Ac'h ?

Ar vamm

Miliner eo ho tad. Ret-mat eo deoc'h sikour anezhañ, evit kaout bara a zebriñ.

Ar vugale

Ur gwall vicher eo bezañ miliner !

Ar vamm

Sammit ho sac'hadoù bleud ha deomp adarre !

(Krog int da vale adarre. Diflukañ a ra ur bagad diaouligoù. Spontet-marv eo ar vamm hag ar vugale.)

Ar vugale

Sikour Deomp ! An diaouled ! Spontus eo.

An diaouled

Arabat deoc'h kaout aon.

N'omp ket drouk

Deut omp da reiñ un taol skoaz deoc'h.

Ar vamm

Peseurt taol skoaz 'ta ?

An Diaouled

Skoazellañ ac'hanoc'h da zougen ho sammad bleud.

Ar vamm

Ha pegement a c'houlennit ?

An diaouled

Gwenneg ebet... Nemet hoc'h ene pa varvoc'h.

Ar vamm

Hon ene ! Ne fell ket deomp gwerzhañ hon ene d'an diaoul.

Ar vugale

Ne fell ket deomp mont d'an Ifern.

An diaouled

Bras eo an ifern...

En ifern eo tomm

En ifern n'ho peus ket ezhomm labourat

En ifern ez eus boued war an daol.

Plijus eo an ifern.

Ar vamm

Gwelloc'h eo ganeomp poaniañ war an tamm douar-mañ evit gounit ar Baradoz.

An diaouled

Ar baradoz ! Kaozioù sot !

Ar vamm

Kit kuit bremañ !

An diaouled

Keuz ho po ! Keuz ho po !

DIVIZ 4

Ar miliner gant e azen o tont d'ar vilin. Ar c'hazh a zo o piltrotat war o lerc'h.

An azen

Kae pelloc'h 'ta, kazh milliget. Strobot on ganit.

Ar c'hazh

Ro peoc'h azen kornek ha kae war-raok.

Ar miliner

Pebezh troiad hir ! N'out ket re skuizh azenig kaezh ?

An azen

Geo, skuizh on.

Ar c'hazh

Atav o klemm.

An azen (En ur reiñ un taol «ru» dezhañ)

Dal, targazh fall !

Ar miliner

Va loened kaezh, chomit a-sav gant ho kannoù. Pounner eo ar sac'hadoù greun, a rankomp mont da gerc'hat en tu all d'ar stêr... Salv e vefe ur pont dreist an aber ! !

(An diaouled zo bet o selaou. Al loened o deus c'hweset anezho.)

Ar miliner

Petra a zo, anevaled ?...

An diaouled (hep bezañ gwelet gant ar miliner)

Aber Wrac'h milliget Salv e vefe ur pont, emezout ? Ma fell dit e vefe savet ur pont n'az peus nemet lakaat da anv e traoñ ar parch-mañ !

(En ur ziskouez anezhañ dezhañ)

Ar miliner

Unan bennak zo o komz. Pe un hunvre eo ?

(Kenderc'hel a reont da vale.)

DIVIZ 5

Er gêr. Emañ ar vugale hag ar vamm oc'h aozañ koan.

Ar vamm

Deomp ouzh taol, va bugale.

Ar vugale

Ya, mammig, deomp ouzh taol.

Lakaomp ar skudelloù war an daol

Lakaomp al loaioù.

Ar fourchetezoù hag ar c'hontilli.

Un tammig bara du.

Hag ur banne dour.

(Erru eo an tad hag ar c'hazh)

Ar miliner

Mont a ra, va bugale

Ar vugale

Ya, ya, tad. Ha penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

Ar miliner

Mat an traoù ganin.

Ar vugale

Ha te Penn-du ?

Ar c'hazh

Skuizh on o redek war-lerc'h Azenig !

Ar vamm

Soubenn war an daol.

Ar miliner

Soubenn an tri zraig.

Ar vugale

Dour, holen ha baraig.

Soubenn adarre !

Soubenn bemdez.

Souben noz-deiz

Kig, morse !

Fellout a ra deomp kaout kig da zebriñ.

Ar vamm

N'hon eus ket arc'hant a-walc'h da brenañ kig.

Ar vugale

Perak n'hon eus ket arc'hant ?

Evit gellout debriñ kig

Kig moc'h, kig saout, kig kazeg

Kig deñved, kig yer, kig konikl

Kig ha farz !

Bemdez kig ha farz

Sul-ouel-pemdez kig ha farz

N'ez ha deiz kig ha farz

Fellout a ra deomp kaout kig ha farz da zebriñ

Ar miliner

Kig ha farz a vefe da zebriñ en ti-mañ ma ne kollfen ket amzer oc'h ober an dro vras evit kerc'hat ar greun ha kas ar bleud.

Ar vamm

Kit da gousket bremañ ha laoskit o tad e peoc'h...

Ar vugale

Deomp da gousket !

Goulo hor c'hof

Ha sevel abred adarre warc'hoazh vintin.

Evit mont da gas ar bleud.
Ya, deomp da gousket ha da hunvreal.
Hunvreal gant ur pladad kig ha farz !

Ar miliner

N°z vat, va bugale !

Ar vugale

N°z vat tadig, noz vat mammig.

Ar vamm

Ma ! Me zo o vont ivez... Aze e chomi c'hoazh ?

Ar miliner

Ur pennad nemetken.

DIVIZ 6

Ar miliner gant ar c'hazh

Ar miliner

Malañ greun d'ober bleud ha tamm bara ebet da zebriñ.
Bezañ kazh miliner ha bevañ er vizer !

Ar miliner

Te c'hoazh a c'hell mont da logota ha da labouseta.

Kazh

Siwazh, e ti ar paou, n'eus logodenn ebet na labous ebet.

Ar miliner

Salv e vefe ur pont dreist ar stêr !

(Difoupañ a ra ar bagad diaouled en ti dre doull ar siminal.)

An diaouled

Ah ! Ah ! Ah !

Ni eo an diaouled spontus
Deuet omp eus an ifern
An ifern yen, an ifern domm
Evit spontañ tud an Douar.

(Dañsal a reont)

Ar miliner

Na petra eo hoc'h anv ?

An diaouled

Lusifer eo va anv, mestr bras an Ifern.

Belzebut on-me, mevel bras Lusifer.

Ha me Mefistofelez, ar mevel bihan.

Satanaz on-me...

Paolig Kornek, an diaoul kamm.

Astarot...

...ha Berit.

Lakaat a reomp ar bed da grenañ gant ar spont.

Ar miliner

D'ober petra oc'h deuet amañ ?

An diaouled

Ur pont 'peus c'hoant kaout ?

Ur pont bras.

Ur pont hir.

Ur pont hir.

Dreist an aber Ac'h

Ar miliner

C'hoant am eus kaout ur pont, gwir eo.

Piv a savo ar pont-se din ?

An diaouled

Me zo ouest da sevel ar pont-se din ?

Ha me ivez, ha me ivez.

Ha me 'ta !

Ar miliner

Gwir eo ?

Ar miliner

Gwir bater eo.

Ar miliner

Pegeit e vezoc'h oc'h ober al labour ?

An diaouled

Un nozvezh nemetken.

Ar miliner

Pegement e vo ?

An diaouled
Ne vo ket ker.
Un dra nemetken.
Un dra vihan nemetken.

Ar miliner

Peseurt tra ?

An diaouled

An ene kentañ.
An ene kentañ a dremeno war ar pont.

Ar miliner

An ene kentañ ?
Ret eo din ober va soñj.

Ar c'hazh

Lavar ya 'ta !

Ar miliner

Mat eo din, an ene kentañ?
Greomp ar marc'had.

(Mont a reont kuit goude bezañ gant o dorn e dorn ar miliner)

DIVIZ 7

Erru an Ael e-kreiz ur sklerijenn vurzhus

Miliner

Sell 'ta piv ! An ael. An ael eo.

Ael

Souezhet out ? Er gêr emañ.

Miliner

Er gêr ?

Ael

Milin an Ael eo ar vilin-mañ.

Miliner

Ne oac'h ket aet er-maez ar vro.

Ael

Morse ne'm eus kuitaet va milin. Ho tiwall a ran.

Miliner

Hon diwall a rez ha n o vevañ e-kreiz ar baourentez.

Ael

Emaoc'h o c'hounit ar Baradoz ! Perak 'peus graet marc'had gant an Diaoul ?

Miliner

Dre druez ouzh va gwreg ha va bugale.

Ael

En ifern e vo krisoc'h c'hoazh.

Miliner

Petra ober e-giz all ?

Ael

Lak ar c'hazh da dremen da gentañ.

Ar c'hazh

Ha me a vo paket gant an diaoul !

Ael

Te ne'z peus ene ebet !

Ar c'hazh

Ene ebet ! Biskoazh c'hoazh !

Ar miliner

Trugarez dit, va ael mat. Evel-se e c'hellin touellañ an diaoul ha saveteiñ va familh.

Ar c'hazh

Ha me 'ta ? ...Laouen on da c'hellout c'hoari un dro-gamm da Baolig an Diaoul...
kamm !

DIVIZ 8

Emañ an Diaouled o labourat da sevel ar pont

An diaouled

Bec'h d'al labour diaouledigoù.

Pezhiadoù mein, pezhadoù kerreg, pezhadoù reier...

...lakaet stok-ha-stok, a-dreuz ar stêr.

...evit sevel ur pont nevez, ur pont hir-hir, uhel-uhel, ledan-ledan...

Gant pemp toull dindan, da laosker an dour da dremen...

...

Setu echu al labour.

Echu eo ar pont. Gortozomp hor gopr bremañ.

Setu erru ar miliner gant e familh.

Ar miliner

Na pegen bras eo ar pont.

Ar vamm

Na pegen kaer eo ar pont.

Ar vugale

Na pegen farsus an dour dre an toulloù.

Ar c'hazh

Emaon o vont da vougañ er sac'h-mañ.

(er sac'h)

An holl

Meuleudi deoc'h, diaouled !

An diaouled

Emaon o c'hortoz va gopr !

Ar miliner

Setu eñ !

(en ur zigeriñ ar sac'h)

Ar c'hazh

Setu da c'hopr Paolig. Paeet mat out bet ?

Un diaoul

Ur c'hazh ! Laeret omp bet, trubardet omp bet. Ur c'hazh du ! Sikour !

Sikour...

(Mont a reont kuit dirak ar c'hazh)

Ar c'hazh

Deus amañ Paolig ma rin stripoù ganit !

(An holl da c'hoarzhin)

Ar miliner

Paket an diaoul ganeomp.

Ar familh

Ha savet ur pont nevez deomp.

Ar vugale

Aesoc'h 'vo al labour bremañ.

Pinvidikoc'h e vimp.

Boued mat a vo war daol.

Ha kig ha farz.

Ar miliner, *a-gorn*

Deomp da labourat. Bremañ e vo plijus al labour.

Holl

Ya deomp da labourat milliget Ra vo milliget ar pont-mañ ha kement hini a dremeno warnañ.

Pont an Diaoul a vezo graet anezhañ hiviziken !

Echu.